

Græt gant Per AR YANN, var eur Maleur arruet e Quemper-Corantin da zul ar Baçzion

Var ton ; Pevar Den a barrès Plufur.

Deoc'h-u eta Guerc'hes Vari
E teuan den n'em recomandi :
D'am Eal mad a d'ar Speret Santel,
Da rei dign sclerigen hep appel
Mar tisclerijign e ber amzer
Ar malheur so erruet en Quemper ;
Quement a glevo a c'hano
A gleffe e oad donnac da yenia

Clevet o c'heus comps a valeurio
Cals a dud dre zenni ho deus souffret ar maro ;
Mæs evel quent ar c'hruella poan
E tevi e beo e creis an tan.

An-antrou sant Loraoc biniguet,
Hennes a ouffe deoc'h lavaret
Pegen cruel eo ar poaninou
Ho tevit e beo e creis ar flammou.

Deiz evit deiz da nös sul ar Baçzion,
Are-mie ha voa joaüs a galon ;
Atlas ! na souje bini a ne
Evije hirroc'h an nös evit o bue.

Prest goude an unecq eur
E voa commencet ar malheur,
E maint ho tevite creis an tan
Quencouls ar bras evel ar biant.

Atlas ma bugale emezi,
E creis an tan red eo devi
Hep na gallout en em souten
Na caout sicour digant den.

Eur soudard e voa oc'h ober faction
E quichen dor ar prison
Ha pan deves quet an tan goallit
Eo bet commencet da grial :

An hep so cousquet difunet,
Car ar malheur a so pisset
Deomp da zicour ha da souten ;
Mæs, atlas ! neus quet a voyen.

Pa voant eat e penn an ty
E c'hlijont ar c'hlem hac ar c'hry
Gant ar vugale hac ar vamm
Ho tevi e creis an tan flamm

An tocsin hag an taboulin
A sonne e Quemper-Corantin
Da avertissa ar bomperyen,
Car ar malheur a so certain.

Dont a rezont bras a bian,
En eur gryal : dan tan, dan tan !
Hini a bed na poultrone
Evit mont e danger he vae.

An escop hac ar veleyn,
Ar freret hac ar scleriyen,
Tuc'hentil ha paysantet
Tout e maint oll o redet.

Ar zoudardet, ar gardnational,
Tout e redomp a racial
Ma vije moyen var boes sicour
E vije obtenet dezo recour.

Ar gendarmet, an archeryen pouliz,
Ar c'houmiczer ar re liçz.
Da zae'hel dour da bomperyen
Da daule var nein an doën.

Atlas ! ma c'halon a vancq dign,
Va goad em goaziet a ten da frimi
Pa songean n'oc'h eus clevet netra
Evel ma lavarin deoc'h breman.

Pa glevas ar vamm e bugaligou
O c'ria e cris ar flammou
A rea muyoc'h a boan dezi
Evit ma rea an tan eus e devi.

Gredet hardiz va foannio zo bras,
Ar c'hiq oar va æsquern zo dija poas,
Ha c'hoas e carfen am be da souffri
Poanniou va bugale gant va hini.

E man oaged a drivoc'h vloa
Gant eur gourach eus ar vrassa
En nem loosq dan traou eus an eil estach ;
Credit e hesquernigou a stracas.

Eur c'hostez anezau a voa grillet
Hag e galon a voa mantret,
Choaz e zave ene zao he-unan
En eur goulen : Pe-leac'h e man va vamm ?

Dan hospital e voe douget
En trista stad ma affec'h da velet,
Ua tu a nezan grillet gant an tan,
Hac e galon mantret gant ar boan.

Dion verc'h devoa o servicht
Pa voa annoncet dezo ar malheur cri,
Ma lavare an eil hac e ben anezo ;
Me garfe vent o vont d'an douar ganlan.

A-dalecq en eur eus a vrema
Betec an eur div-za,
Pa teuyd d'in sonch eus o maro,
Va daoulagad a rinqo scuyla daëro.

Ho hesquernigou a zo dastumet
Nemet ar re a zo bet ludet
Lacqueat e zint ha levar en memes goest
Ha casset par veret assambles.

Eur pobl tud a voa en ho enterrament,
Qen boufe hissyen quem payzand ;
Ho c'halono tout a sesye
Hag an dour gan ho diou jod a rede.

Me ho suppli o va Jesus !
D'ober onto eur zel truëzus ;
Prezervit a nezo eus tan ar purgatoar
Pa zint devet e beo var an douar.

An nep zo bet quirecq
Eus ar malheur a zo arruet
A voa cousquet er marchosi
Pa zeuas an tan den difuni.

Sortyet e bet e secret
Pes a zo caus ma ze puniset
E lec'h beza difunet tud an ty
A ranc ober e c'hanan e sorty.
Avoalc'h em beus deoc'h lavaret
Evit ar blijadur o peus eus ma c'hlevet ;
Monet a ran da finissa
Dre eur malheur ar c'hruella.

An deiz varlec'h, e parrous Plomeur,
A zo erruet ar memes malheur
Gant eur den priveat a sclerijen ;
Silaouet tout gyltibunen.

Renan Caoudal en evelé
A goeze an tan var e c'horre
Hag evit sonjal en em sicour
E tiredas da doul an nor.
Allas ! an nor a voa alc'hoët
Sortial er mes ne alle quet,
Bale e lec'h ma carre dre an ty
An tan e voa bepret eus an devi.

En toul an nor e ma bet couet,
Hac eno e zep bet chomet,
Ha pa voar deût da zével anezan
E ceuêze e entraillou deoutan.

E hesquern a zo bet destumet
Nemed eur vrec'h dezan ne quet bet cavet;

Hounnest so bet luduet quicq hac hesquern,
Oh ! crissa maro eta, christenien.

Cetu eur malexour aman;
Ma breur da c'hoar, sellomp ennan,
Dallaret eo ; redouplomp hor pedennou
Ma pellaï diouzomp ar goal blanedennou.

Quement a glevo ar guers-man
A greffe lavaret da neuboutan
Bep a Baler a peb a Ave
E delivrank deus ho ene.

O va Jesus ! me e supplis,
Bezef eta truhez ouzommy :
Recevet ac'hanomp en ho gloar
Pa ezaimp quit divar an douar.

RECIT

*Composet a nevez var sujet ar Maleurus an eus tennet var ar Grucifi,
en départamant a l'Oorr.*

VAR UN TON TRIST.

BRETONET me ho supli tostait da glevet
Eur recit deus un exempl a nevez arruet
Mar be madeles Doue rei din ar sclerigel,
Emeus c'hoant da disclerian en toues ar gristenien.

Un den a religion a glevo quement-ma;
E oat hac e oazion a deniou da grena;
Ma unan eo troublat ma speret en en ier
O clasq dibab er façoun da rei da intent scler.

En heisvet debes voar nugent a vis gouengolo
Er blaves c'huec'h var nuguent, c'hellaouet cristenien,
E voa en daou den maleurus gant an hent e vonet
Evit ober eur veach o devoa prometet,

Unan deus an daou den-mâ a voa eur chasseur,
Hac a beai an droit chasse da vale e gartier,
Hac a dougue e fusilh partout elec'h ma hai
Dre ma voa bet surprenet e c'hoat gant ar lone gouet

Hac o tonet da dremet eur c'halver a nevez
Savet en tal eur verret en fin eur jubile,
Hac a doug ar figouriou diæus ar bassion
En eus souffret on Salver da bean on rançon.

Unan a nes a dennas e doc divar e ben
Evit ober e dever evel ar gristenien,
Da saludi ar Salver santel a biniguet
Abalamour den imach a voel crucifiet.

Distrai res ar maleurus pa voeles quement-mâ;
Dre eur gos injurius a c'houlennas ountân ;
Da betra tenes da doc, eme, den ingrat,
Te sonch dit bea salvet o saludi eun tam coat ?

— Guelet a ran dirason da veste a ma hini
Laquet dre hon fec'hejo ebars er grucifi,
Ha pe denio don gurvel vo ret apparissan
A rentan cont d'ar barner pa sonjomp nebutan.

— Arret a me dicoueo dit en un instant
A pe fel did lavaret eo cren a puissant,
Brassoc'h mestr e hon evitan pa man er grucifi.
Me he disqueno d'ar douar bep donet d'e bidi.

Sevel a ra e fusilh hæ eneus-an-tennet
Voar en immach adorabl eus ar Christ biniguet,
Ha dre an toul en eus gret et stringuas er goat
Quen e he bet ahimet bijas ar misirabl.

Dre ar boize deus an torfet e deue bet cometet
E tigores an douar har en emeus-an lonquet
Dre bermission Doue betec e diou gasel
Ma voe rentet en eur stat pitoyabl a cruel.

E gamarad pa velas quement-mâ
A dap croc en e divrec'h evit essa e denna,
Misericord e crias a ma voa estonnet
Ha ma c'hes d'ar presbyter evel un den egaret.

Supplia a ra ar c'hure da dont gantân an ent
Hac e teuont assables da visitan an exempl ;
Fatiquen ra ar belec pan o deus guelet ar goat
O toud deus ar grucifi ous an den miserabl.

Er spaç deus a bemp debes eo bet er plaç-ze :
Ne neus den evit compren ar poaniou a souffre
Dre bermission Doue dalc'het en e brison
Quen a deu an autrou Escop hac e brocession.

Ar c'hure, an den mâ a partias en quer
D'ober declaration en eur memes amzer
Dirac en autrou Escop hac an oll sujedet,
Hac a leun a jestini e voan oll estonet

Ar sul vintin e pignas an autro-Escop
Er gador a guirionez evit averissan ar bobl
Da donet de accompli gant e procession,
Ma tengent d'ar plaç santel gant guir devotion

Pa voa ar bobl d'an daoulin dirac ar groas santel
Dre bermission Doue aparisses doau Ell,
A gante pobl a venvec da doulan an douar
Evit rai e liberte d'ar paour ques criminal

Douguet eo d'an illis d'assistan en oferen
A celebre an Escop hac e oll veleven
Da drugarecât Doue hac ou Man biniguet
Deus eur c'harç quen admirabl o deus dezi accordet,

A c'hane a voa transportet gant e vam hac e dat
Da finisan e vuez en eur stad pitoyabl,
Mut, bouzard hac innocent a rente isely
Hep galloud en em zicour a hini mui quiny.

Pevar debes var nuguent eo pet en e voe
E souff poan a pinigen quen rentan e ene ;
Goulennomp oll a galon ma vezo recevet
Gant Jesus hac ar Verc'hes e pales an Dreindet.

An den-mâ a oa oaget deus eur bla var nugent,
Ar barres Sant-Yan ar C'hoar, evit rei da entent,
En départamant a l'Oorn : setaouel christenien
Un exempl considerabl a spontus da gompren